

— 232 —

## SONNEN

*Er miloérieu argant*

*Chetu ur soñen gob amen anaüet ér pear horn a Vreïb. Neocab el liésan n'hé goutier ket a feson. Chetu perak e kredamb gobér plijadur de rab bul lénerion é lakat amen unan hag e zisko bout abéh, deustou debi bout dishaval un tammig dob en hani e gavér ér Barzaz Breiz ba dob en hani e vou mollet eùé é Guerzenneu ha Soñenneu Loeiz Herrieu. En E. Paul, person Sant-Karadeg, Henbont en des hé dastumet aveit Dihunamb Bennob Doué dehon.*

- |  |  |
|--|--|
| <b>I</b><br>Er verhig-hont a Gervojel<br>Honneh um gay bras hag ihuél !        | <b>IX</b><br>« Lakeit tri boket ar mem bé :<br>« Deu a ré roz, unan loré.      |
| <b>II</b><br>Honneh um gay plah braú ha koant<br>P'um sél én hé miloér argant. | <b>X</b><br>« Lakeit-mé ar païé Guénéed,<br>« Léh ma tremen er gloréged.       |
| <b>III</b><br>Ha sél muioh men um sellé,<br>Ha braúoh braú en um gavé.         | <b>XI</b><br>« Ma keméreint beh a voket,<br>« Pen dei er hloér ag er véned (1) |
| <b>IV</b><br>Hé mam laras debi, un dé :<br>« Me merh, o na brauet ous-té ! »   | <b>XII</b><br>« Hag é larou en ol bautred :<br>« Amen ma interret Janed ;      |
| <b>V</b><br>« Mam, erbat é hrad'ein bout braú<br>« Pe n'em diméet ket ataù ! » | <b>XIII</b><br>« Amen ma interret Janed ;<br>« Mehoant-mé hag en olbautred »   |
| <b>VI</b><br>« Taüet, me merh, n'um chifeské.<br>« Aben ur blé vei diméet. »   | * * *  |
| <b>VII</b><br>« Ne pas, me halon e lar d'ein,<br>« Aben ur blé vou é varuein.  | <b>XIV</b><br>« Me oé unan ag er bautred,<br>« Ha me halon oé get Janed        |
| <b>VIII</b><br>« Ha mar bein marù aben ur blé<br>« Lakeit-mé én ur bé neué.    | <b>XV</b><br>« D'er gér e oé me chonj monet<br>« Habremen d'er gér nen deinket |

(1) Bened ha bered e zou ur sord,

## XVI

« Na tad, na mam ne vou chifet,  
« Mardalhan d'erskolé Guénéed »

## XVIII

« Kuitat er bed d'ein mé zou ret  
« A p'en dé marù men dous Janed

## XVII

« Ha bonjour d'oh hui e laran  
« Kuitat er bed de vad e hran

## XIX

« Interret-é men dous Janed  
« Ha me faut d'ein bout béleget

## XX

Hag, a p'en dé volanté Doué,  
Me vou beleg aben deu vlé.

## *Korn er beginerézed*

## KATEU RI

Lakeit ur hartron ri de goehein en un hantér litrad leah dous hng ur hartron sukr. A p'en dé poeh mat er ri, dichennet diar en tan ha lausket de ieinein. A pe vou ieia, torret tri ui ér ri ha mesket ind mat.

Téet nezé amonen en ur mol ha taulet er ri ér mol-sé ; lakeit de boehein un hantér ér én ur forn. A pe vou poeh ha ieinnet hou treu, troeit tu d'er mol ar ur lestr ha chervijet get koëuen vanillet pé koëuen uieu.

## KOËUEN VANILLET

Lakeit un hantér litrad leah de verüein ar en tan get un tam vanill ha 50 gram sukr. Dichennet diar en tan a pe verù, ha lausket de ieinein. Braset tri milén ui ha taulet ind ér leah-sé. Mesket ind mat ; silet er leah-sé nezé ha lakeit ean endro ar en tan, meit n'er lezet ket de verüein, (En tam vanill e hel chervij diù huéh )

V. L.

Eih té e rekér eit diskein lén brehöneg a pe houiér lén galleg.